

Gwerz Sant Konogan

Ton anovezéf.

DISKAN :

Sant Konogan, eskob Kemper,
 Klevit pedenn tud ho karter :
 Mougit ennomp, en han ' Doue,
 Terzenn ar c'horf hag an ene.

1

Ganet eo tost da Landerne
 An hini vo eskob Kerne ;
 A ouenn uhel ez eo e dud
 Eus a noblans maner Palud.

2

N'eo c'hoaz német bugel tener
 Pa zarempred skolaj Kemper ;
 Ken lemm, ken skler, eo e spered
 Ma sked evel bannou stered.

3

Landevenneg, goude Kemper,
 A ro digor d'ar studier :
 Skol ar venec'h, skouer o buhez
 A zesk d'ezan ar santelez.

4

Pemp bloaz e vo den a vrezel
 E bro Leon en eur chastel ;
 Met inouet egiz marc'heg
 E kav gwelloc'h mont da veleg.

5

E Landerne eo e labour
 Enep an diaoul, an enebour,
 Da ziframma diouz e skilfou
 Kement a c'hell a eneou.

6

'Wit ar beorien eun tad mager,
 Egiz eun èl ouz an oter,
 Spered nerzus ha kalon c'han :
 Setu skeudenn sant Konogan.

7

Hag eun dervez, marvet e dud
 Ar Sant a dec'h diouz ar Palud
 'Wit en em denn d'ar manati
 Oa bet ennan war ar studi.

8

Landevenneg, lec'h a bedenn,
 A wel ar Sant er binijenn :
 Bara segal, griziou louzou
 Ro' nerz neve d'e vertuziou.

9

Manach santed, Sant Konogan
 A dle speria 'giz ar gwenan ;
 Setu ma sav tal Landerne,
 War urz e dad, eun gouënt neve.

10

Met etretant, varv Korantin
 Ha Kemperiz, war o daoulin,
 A ouel, a bed hag a c'houlen
 Egiz eskob ar manac'h Guenn. (1)

11

« Mouèz ar bobl, mouèz Doue ! »
 'Man Konogan eskob Kerne.
 Bepred ez eo ar « Pastor mat »
 A gar e bobl da di an Tad.



(1) Guvenn = Konogan.

IMPRIMATUR :

Quimper, le 29 Août 1951.

M. Hervé, p. g.

T. S. V. P.

Da gana gant an Angelus

Angelus Domini...

1. Ni ho salud gant karantez,
Rouanez ar Zent hag an Aelez.
C'houi à zo benniget — O pia,
Hag a c'hrasou karget,
Ave Maria !


Ecce ancilla Domini...

2. Ra vezo benniget Jezuz,
Ar frouez eus ho korf evurus !
Kanomp gant an Aelez — O pia,
E veuleudi bemdez :
Ave Maria !

Et Verbum caro...

3. Ni ho ped, Mari, gwerch'ez c'hlan,
Pa vezimp war hon tremenvan,
Da c'houlenn ouz Jezuz — O pia,
D'eomp eur maro eñrus — Ave Maria !

Ora pro nobis, sancta... Oremus... Gloria Patri...



Adoromp holl

1. Adoromp holl, e Sakramant an Aoter,
Doue kuzet, Jezuz, hor Mestr, hor Zalver.
Sperejou evurus, Elez ar Baradoz,
Gant karantez a dan meulit-heñ deiz ha noz.
2. Gwir Vab Doue, en em c'hraet den d'hor prena,
En osti sakr oc'h kuzet 'vit hor maga ;
Plijet ganeoc'h skuilha, eus ho tron an aoter,
Warnomp daoulinet amañ ho pennoz, va Zalver.
3. Enor ha gloar ha karantez da Zoue :
D'an Tad, d'ar Mab, d'ar Spered Santel ive ;
Re vezo e pep lec'h an holl grouadurien
Aketus d'e veuli hirio ha da viken.